

Jan 1900

**KANTIK NEVEZ****ITRON VARIA RUMENGOL**

Lili, arc'hantet ho deliou,
Var bord an dour so er prajou ;
Doue dezho'roaz dillad
A skuill er meziou peb c'houez vad.

DISKAN

Itron Varia Rumengol,
Guerc'hez gallouduz, remed holl
Roit d'eomp hirio, enn han Doue,
Iec'hed ar c'horf hag an ene.

O Rumengol, pell amzer zo,
C'houi he boket kaera hor bro,
Peb rozenn goant, beb lilienn,
A zo disliv enn ho kichen.

- N'euz elestren ebed er prat
A daolfe kement a c'houez vad :
E Leon, Treguer ha Kerne,
Ganeoc'h e klever c'houez an Ee.

- Bleunia 'rit c'hoaz enn bo kozni
E liorzik goudor Mari ;
- Rak hor mamm dous n'eo ket edro
Pa gar eur vec'h eo 'vit ato.

Var ann Arvor gant ar Verc'hez
Oc'h bet lakeet da rouanez ;
Rumengol eo he merc'h hena,
Gant-hi eo karet ar muia.

Hon tadou koz a ioa kousket
Et tenvalijen ar pec'hed :
Maro var roudou beb hini....
Ifern heuzuz o tigeri....

- Var ar mean ruz e skuillet goad
Hag er C'hrannou, e kreiz ar c'hoad
A zindan derven Teutates,
Tud veze lazed heb truez

Tec'hit, doueou digalon,
Setu Guennole ha Grallon :
Tec'hit, tec'hit... Var ar meam ruz
Eo savet chapel mamm Jesus.

E leac'h ar goad, dour ar vuez
A red enn illiz ar Verc'hez :
He c'haloun eo an eienenn
Ne vezo dizec'het biken.

E Rumengol, ar pelerin,
A bedo stard var he zaoulin,
A velo a dreuz he zaelou
Evel digor lez ann Envou.

Ma salut teir guech an oter
Enn eur adori hor Zalver.
Teir guech e vezo benniget
Gant tri ferson sakr an Drinded.

Ma ra seiz guech tro ar chapel
Gant *Ave* en eal Gabriel,
Mari hen diouallo bepred
Diouz Satan hag ar seiz pec'hed.

Ha ma tigemer an hosti
He galonn ennhan o virvi,
Ouz Jesuz e chomo stag mad
Etrezho birviken kimiad.

Pelerined, gri evel-se,
Kaout a refet grasou Doue :
Hag e veac'h deuet enn eur lenva
C'houi ielo kuit enn eur gana.

LE BRUN.

